

YF_0028_Ar Paour hag ar Pinvidig

Galv

Na pa oan-me e-barz Sant-Jermen oh ober tro ar ruiou
Am-boea keun da Boullaouen ha da blas an dansou

Plijaduriou evidon-me na n'eus ket e-barz Pariz
Evel pa oan e Breizh-Izel o roulen ma yaouankiz

Tamm kentan

Nann, n'eus ket e-barz ar bed-man eur blantenn diwanet
Hag eman he oll brankou e-barz ar memez uhelled (hag a vefe he oll brankou)

Na n'eus ket daou diegez e-barz en or hontre
Da gaoud kement a vadou an eil hag egile

Pa zonjan er pinvidikan den a zo lakaet war ar bed
Ez eo an hini en em gontant er stad ma'z eo rentet

Me o klask ma zamm bara gans eur galon laouen
A zo kalz eurusoh evid darn gand o moaien

Darn a zo gand eur bern madou ha c'hoaz en em gontantint ket
O spered e peb amzer a zo meurbed chagrinet

O klask dastum an oll vadou e-barz eur goz votez koad
Hag e teuont da en em brivan deuz a voued hag a zilhad

Ar re-ze kenkoulz ha me, eun devez a erruo (Koulskoude ar re-ze ha me,)
A zerro evel don-me o daou zornig goulo